

# LIZER

AN

## OTRO 'N-ESKOB SANT-BRIEG HA LANDREGER


D'ar Veleien ha d'ar Gristenien eus e Eskopti

Ha Gourc'hemennoù ar C'Hoareiz

evit ar blavez 1928 goude donedigez hon Salver

---

## Doue ha poaniou an den war an douar



SANT-BRIEG

MOULLET EN TI RENE PRUD'HOMME

*Moullier an Eskopti*

1928

# LIZER

AN

Otro 'n-Eskob Sant-Brieg ha Landreger

*D'ar Veleien ha d'ar Gristenien eus e Eskopti*

**HA GOURC'HEMENNOU AR C'HOAREIZ**

EVIT AR BLAVEZ 1928 GOUDE DONEDIGEZ HON SALVER

---

**Doe ha poaniou an den war an douar**

---

FRANÇOIS-JEAN-MARIE SERRAND

Dre drugare Doe ha beli Hon Tad Santel ar Pab,  
Eskob Sant-Brieg ha Landreger,

D'AR VELEIEN HA D'AR GRISTENIEN EUS HON ESKOPTI

*Peuc'h ha bennoz a-beurz Jezus-Krist, Hon Otro*

---

HON BREUDEUR KER,

Warlene e klozen ma lizer a C'hoareiz en eul larout e talc'hfen vit ar bla da zisplegan dirazoc'h ar wirionez ac'h omp krog ganti, da zisklêrian d'ec'h e zo eun Doe. Gwirionez eus an talvoudusan; ken meur rak se, em eus c'hoant da adkrigi enni d'he diskoe d'ec'h adare, met en eun doare nevez.

Er bla tremenet, em oa diskoeet e zo eun Doe : hon spered, dre e nerz hag e ijin e-unan, a embann ar wirionez-ze; warni ec'h eo red d'imp kemer harp,

nemet c'hoant hon dije da dremen evit tud diskiant, ma fell d'imp kompren ha rei da gompren perak n'eo ket parfet ar bed ha dre benoz e zo 'n em gavet ennan eun urz ken reiz hag eur furnez ken poellek.

Met digas a ren da sonj eus eur gir skrivet gant eun den gwiziek, Pascal e hano; larout a ren « an nefe ar galon awejou rézoniou ha n'anave ket ar spered anê »; ar spered, siouaz, na ro ket dalc'hmat dreizan e unan e varnedigez diwar eun dra: kaer an nefe ar wirionez o vean skedus dirag ar spered, ken skedus awejou ken ma n'aller ket tec'hel diwarni hep penn-boellan ar spered e unan, bepred e ve klevet eur vouez o sevel a-eneb da lakât, mar gall, kreiz tre ar spered hag ar wirionez evel eur gwel a denvalijen. Ar vouezze ac'h eo mouez klemmus ar c'horf dindan gwask an trubuilhou. Hag en meur a zen ar glemmaden a losk a zo ken skelt ha ken krenv ken ma voug mouez ar skiant-vat.

Gouzout a ret war besort ton e ve displeget ar glemmaden: N'ez eus Doue ebet, rag ma vije eun Doue, n'allje bean nemet unan mat ha madelezes dreist-muzul; eun Doue mat ha madelezes dreist-muzul na n'all ober nemet oberou mat. Ac'hanta, ar bed n'eo ket eul labour a vadelez: warnan ar boan a ren evel eur rouanez; n'ez eus ket eur c'hrouadur, ha d'ean eur c'horf da santout, ha na vefe ket bet kroget ennan aliesoc'h evit bemde turkez eur boan benag. Ar bed eta n'all ket dont eus tre daouarn eun Doue. Neuze e c'haller ive larout na zo Doue ebet.

Pehini anoc'h na n'eus ket klevet de pe de, tro pe dro, komz evelse? Ha ped anoc'h marteze o deus, int ive, komzet er stumm-ze pe, da vihanan, bet c'hoant d'hen ober?

Hag-en, koulzkoude, ec'h ê talvoudek ar gôz-ze! Al lizer-man hen diskoeo, hag eviti da dougen a-ziavez liou ar wirionez, em eus fianz e rin aezet awalc'h da intent d'an holl pegen skanv ec'h ê ha pegen kleuz en he c'hreiz.

Nann! ar Boan na zav ket a-us d'ar bed eneb Doue evel eur rebech peurbadus d'e vadelez; pell ac'hane! Rag ar boan a zo eun testeni eus karante Hon C'hrouer, dre ar vadelez wirion a zo eus he heul ha dre ar frouez kaer a c'hall dougen.

I

Da gentan holl, Hon Breudeur Ker, e c'houllan diganez'ha derc'hel bepred dirag ho spered an dra-man: An den nê dlee ket, a-beurz Doue, anaveout ar boan nag an anken. 'N eur dont eus tre daouarn o C'hrouer, hon zud kentan a veve hep poan ebet en stumm ebet, hag a dlee bevan er stad-ze diboan ha didrubuilh dalc'hmat: ar vue neuze a oa gret a zouzder hag a blijadur; netra na deue da goac'han pe da zispenn o levenez, hag an douar, hag a deuje divezatoc'h da vean evitê eun « draouien a c'hlaç'har », evel ma lavar an Iliz Santel en hec'h ofis, a oa d'ê eur baradoz.

Siouaz! dre o dizentidigez da urziou Doue, e

kolljont ar c'hras kaer-ze. Skoet e-maez eus Baradoz an douar elec'h m'o devoa tremenet deiou ken evurus, e klevjont eneb d'ê eur setans pouner hag an neus digaset beteg d'imp, dre hon zadou hed an amzeriou, n'eo ket eun hekleo anean hepken, met ive ar boan a oa barnet gant Doue : « Den, eme e Grouer, dibri a ri da vara adalek breman, gant c'houezen da dal ; *in sudore vultus tui vesceris pane* ». — « Grweg, emean, genel a ri bugale e kreiz ar boan ; *in dolore paries filios* ».

Setu eta kollet gant Adam hag Eva o zenzoriou. Int, da vihanan, hen anzav e renker ober, n'allent ket dizrei ouz Doue da laret e oa hen ar penn-abeg eus o gwalleur. N'o. devoa d'ober nemet 'n em gemer outê o-unan, ma oa koueet ar gwalleur war o fenn, rag Doue a oa e volonte gwelet anê evurus penn-dabenn. 'N eur goll o evurusted, eta, ec'h ejont eneb holonte Doue. Gant o daouarn o deus o-unan diframmet an ti kaer ha glan savet gant Doue en o ine. Dre o fôt, e gwirionez, dre o brasan fôt, o deus harzet o C'hrouer da lezel gantê e zonezonou.

Larout a refer d'in, Hon Breudeur Ker, ec'h ê gwir kement-se evit ar pezh a sell ouz Adam hag Eva, met evit ar pezh a sell ouzomp-ni ? Hag-en n'hon deus ket a abeg da glemm ? Perag astenn beteg war hon chouk ar vac'had a roe d'hon zud kentan goude o fec'hed ? Perak lakât war hon diousoa bec'h eur pec'hed n'hon deus ket gret anean ni hon unan ? Hag en, dre justis na dleje ket Doue bean esperniet anomp, pe, da viha-

nan, dre vadelez, bean distroet diwarnomp e zorn ken pouner ?

Ni ho ped, Hon Breudeur Ker, n'ankouaet ket n'eman ket e natur an den bevan hep poan : neuze eta ar pezh an neus lemmet Doue digantan na oa ket dleet d'ean : chom war ar douar hep gouzanv na poan na trubuilh a oa eta eur c'hras hag eur c'hras kaer digant Doue.

Met ar c'hras-se an O. Doue a c'halle stagan anei ouz an divizou a garfe ; e gwirionez, hen ober a reas : divizout a reas na lezfe e zonezonou burzudus gant hon zud kentan ha gant o bugale war o lerc'h, nemet ma 'n em diwaljent diouz ar pezh a zifenne d'ê ober. Ha piou a gavo da larout war gement-se ? N'ez eus den ebet en hon zouez hag a deufe biken c'hoant d'ean da rebechan unan benag hag a larfe da eun all : Setu aze madou hag a roan anê dec'h, dec'h ha d'ho pugale war o lerc'h, ma keret krout em c'henver an doujans a zo dleet d'in ; breman avat e laran d'ec'h : ar madou-ze holl a vo lemmet diganec'h, hag, evel just, na n'efont biken d'ho pugale, ma na diskoeet ket d'in an doujans a zo red. Ac'hanta, petra an neus gret Doue en hon c'henver ? memes tra evel an den-ze. Klemmet eta, ar pezh ar garfet, eus Adam hag Eva a zo bet diskiant awalc'h da goll ar madou ken talvoudek roet d'ê evit netra ; klemmet evel bugale war o zud pa welont an neus fontet o zud o feadra ha n'o deus lezet gantê netra goude o maro. Met klemm ha 'n em sevel eneb Doue ? Nan, e gwirionez ; Doue hag e justis a zo

a-ziavez eus ar pezh a zo c'hoarveet gant hon zud kentan. N'all ket eta neuze bean tammallet.

Koulzkoude, ma vijemp c'hoaz en riskl d'ober war ze rebechou da Zoue, sonjomp penoz, 'n eur goll ar c'hras-ze a gomzomp anei, na gollomp netra eus ar pezh a zo dleet d'imp dre hon natur den. Ac'hanta, natur an den, da larout eo, natur ar c'horf c'houezet bue ennan gant an ine, ac'h ê santout an treou en dro d'ean, nann dalc'hmat er memes stumm, met awejou gant plijadur, awejou all gant displijadur. Kement-man a zo a wel d'an holl : pa ve re domm an amzer, e ve e diezamant hag e c'houzanver eun tamm poan. Pa ve re ien, e c'houzanver ive diezamant ha poan memes tra. Dre an amzer glouar hepken, pa ve na re domm na re ien, e ve ar c'horf en e vleud ; met an amzer barfet-ze a zo diaes da gavout.

Larout a refet d'in, heñ gouzout a ran : « Met da berag eta ni pe ar bed en dro d'imp na n'omp ket gret en doare a zo ezomm, evit harz diwar ar poaniou ha tanva dalc'hmat plijadur ? N'allomp ket larout e gwirionez e oa dleet da Zoue dre justis, bean krouet anomp pe gret ar bed evel hon deus c'hoant. Sant Pôl a gomz eus kement-se hag a lavar : Hag-en ar pod a c'houlen digant ar poder da berag en neus roet d'ean stumm ma stumm ? N'hon deus droet ebet da c'houlen digant hon C'hrouer n'euz forz petra. Kement tra hon deus, hon deus bet evit netra, hag ar pezh an neus roet Doue d'imp, ec'h ê dre vadelez hepken en neus hen gret, peogwir n'hon deus droet ebet da gaout netra.

Met pegen skedus e lugernje e vadelez en hon c'henver, ma nije lakaet anomp war an douar e kreiz an evurusted hep aon d'he c'holl biken ! »

Setu petra a c'hallfec'h larout, Hon Breudeur Ker ; met daoust hag-en ar pezh a lavaret a zo ken gwir hag e sonj ganec'h ? Sklêr eo, hen anzav a ran, na blij ket d'an den gouzanv poaniou ; klask a ra heuilh e natur ha trei diwarnê. Met ac'hane larout na dlejer gouzanv poan ebet ac'h ê mont buan eun tammig gant eur gistion a bouez evel homan, ha 'n em lakât en riskl da welet an treou eus a-bell hag a-ziavez. Klaskomp eta assembles, ma keret, gwelet an treou eus a-dost hag evel emaint en o diabarz. Digoromp lagad hon spered hag hon fe ha greomp d'hon c'halon tevel eur pennadig.

## II

An den n'eo ket hepken eul loen, da larout eo, eur c'horf hag an neus galloud da c'houzanv poan pe blijadur ; bean ec'h ê ive eur c'hrouadur speredet ha libr da zarempredi an hent mat pe da zihenchan war an hent fall. Dre e spered eta an den a ren eur vue kalz uheloc'h ha talvoudusoc'h evit bue ar c'horf, bue an ine renet gant al liberte. Bue an ine ac'h ê an hini a ro d'an den eur plas kaer, eur plas a enor, a-us d'ar grouadurien all eus ar bed. Mar hon deus c'hoant eta da glask ar pezh a zo ar muian dereat d'an den, na vo ket awalc'h d'imp teurel evez war bue e gorf ha dere'hel kont hepken eus ar pezh a rofe d'ean plija-

dur, met dreist-holl ha da gentan klask hag-en ar boan a ro, ya pe nann, harp ha skoazel da vue e ine.

Ac'hanta war ar poent-se, n'aller ket nac'h ec'h e talvoudek ar boan evidomp; na vo ket diaez hen diskoe dre galz a skoueriou. Met aròk, e fell d'in trei ho spered war eun dra hag an neus evidomp eun dalvoudegez vras, war an dra-man: memes pa ve sellet ouz hon bue war an douar, ar boan a zo evidomp talvoudus-bras.

Lakaomp, ma karet, evel hon deus laret uheloc'h, e vije bet krouet hag urzet pep tra war an douar evit na kavfemp en dro d'imp nemet plijadur dre holl, hag-en hon dije lec'h d'en em ziskoe laouen eus se penn-da-benn? Nann, n'hon dije ket; ar c'hontrel eo: alies e tigoezfe d'imp amanti eus-se. Poan hoc'h eus o kredi anon? Heuilhet ma rezoniou, me ho ped, ha miret doun en ho sonj ar giriou ac'h an da larout hag a lakao sklerijen en ho spered.

Setu aman eur bugel nevez c'hanet: na c'houzanv eta poan ebet, netra na ankreuz anean; na neus eta digare ebet da c'harvat na da ouelan. Sonjal a refet, o mammou: « Pegen brao e vije sevel bugale a sort-se; pegen aezet e vije bean war o zro! » Ha me a lavar d'ec'h: « n'allfet ket dont a-benn d'o sevel. » Ha perak n'allfet ket? Sonjet ervad: penoz e c'houvefet en neus ezomm da zibri pe da evan, ec'h ê klanv pe war vean? An naon, ar sec'hed, an ankreuz, ar boan, 'n eur zigas dour war e zaoulagad hag en eur lakât anean da werouzat, a larfe d'ec'h bean war evez da rei d'ean

ar pez an neus ezomm, boed pe louzou. Met ma na vije poan ebet, petra eta a roje da c'houzout d'ar vamm ezommou he bugel?

Ha breman ar bugel a zo krog mat da vont e-unan, hag en eur c'hoari e koue ebarz an tan pe an dour: an tan an neus e c'halloud, an dour an neus e hini, galloud hag a zo meurbed kaer an eil hag egile. Ha na c'houlfet ket, sur ec'h on, digant Doue lemmel digant an dour hag an tan o galloud; ze a vije goulen na vije ken na dour na tan, ha sellet neuze pebez dienez hepê war an douar! Ac'hanta an tan, dre e natur, a dêv an neb a stok outan, hag an dour a voug an neb a chom dindan. Petra ar c'hoarveo gant ar bugel? E vo dêvet pe veuet! Evit harz ar gwalleur ze da c'hoarveout, e vije red d'ec'h kaout warnan ho taoulagad just pa ve o vont ebarz. Met ma vec'h oc'h ober eul labour benag hep sonjal trei ho taoulagad war ar bugel, neuze e vo achu, rag ar bugel na santo poan ebet ha na welo ket eman e riskl e vue. Ha pa deuiou ar sonj da sellout pelec'h eman, an tan pe an dour o devo gret o labour didrue ha na rentfont d'ec'h nemet eur c'horfig maro, ha c'hoaz e pesort stad! Neuze e welfec'h pegen talvoudus e vije bet d'ar c'hrouadur bihan kaout eur c'horf hag a santje poan.

Gallout a rafen derc'hel evelse gant bue an den beteg e gozni, ha diskoe n'ez eus nemet ar boan hec'h unan da gelen anomp war ar pez a zo mat pe fall d'ar c'horf. Hepi na vijemp diwallet diouz netra; hepi na weljemp ket ar pez a zo noazus d'imp, n' alljemp ket,

endeün, gouzout pesort klenved a vije krog pe war grigi ennomp. Bean e zo medesined hag o deus skrivet : « Ma na vije ket ar boan war an douar, e vije red he digas, ken talvoudus evel mac'h ê. » Ar c'homzou-ze a seblantje bean laret evit farsal; ha koulz Koude, goude ar pezh hon deus laret, ee'h ê red d'imp anzav e zo ennê eul loden vras a wirionez. Nann, ar boan, memes pa na saver ket a-us da vue ar c'horf, na verit ket an holl valloziou a ve stlapet ganti bemde.

Eun dra all a ro d'ei c'hoaz eun dalvoudegez vras, hep klask uheloc'h evit bue ar c'horf : ar boan a zo eus ar gwellan da lakât an den da veskan, da labourât; kaeroc'h so! n'ez eus nemet ar boan da henchan an den war e labour pemdeiek. Lore'h a ve ennomp, ha n'eo ket hep digare, pa welomp an treou a zo bet gret, adaleg an amzeriou kentan, dre holl war an douar elec'h ma neus gallet tapout spered an den, ha pa wellomp c'hoaz e ve dalc'mat gwellaet an treou invariant se. Met teurveomp sellout outê eus a dost, hag e vefomp souezet o welet ec'h ê invariant an holl dreou-ze evit douzât ar boan pe trei diwarni.

Sellomp ouz al labour-douar : Ha sonjal a ra d'ec'h e vije kement a dud pleget war o labour o klask an tu da lakât o douarou da rei frouez muioc'h ha gwelloc'h, ma na vije ket en o c'halon ar c'hoant n'eo ket hepken da gaout eun tamm bara da zibri deus o naon, met ive da zibri o bara gant eun draig benag all, ha ma ne weljent ket e wellaont o stad dre o labour start?

Ha mac'h eomp beteg an uzinou : perak e kaver ennê mistri a ijin o klask hep ehan gwellaet ar benviou pe ober re nevez, ma n'eo ket evit espern poan an oberourien hag ive evit dastumm madou hag enoriou ha brudan o hano? Ar boan a c'houzanvont o welet pegen berr ec'h ê o skiant a vout an den a ijin da glask treou nevez hag an den gwiziek da derc'hel da furchal el levriou. Troc'het ar boan ha raktal e troc'het gwrien ar c'hoant-labourat. An dud holl a baouezo diouz o labour, adalek ma vo troc'het ar wrien-ze, ha neuze peb den a rei, evel gwejall ar rouane didalve, a gousko hed an de.

Hag e gwirione, da berak labourat? Da berak chench an dra-man pe an dra-hont? Na santer ezomm ebet d'ober chenchamanchou, peogwir eman an treou eus ar c'hentan evel emaint. Mat eo kemer poan, pa ve d'ober trei diwar eur boan vrasoc'h, met ma n'ez eus poan ebet? Neuze an amzer a c'hall tremen, ar c'hantvejou a c'hall bernian drekomp, netra ken na ve gret, netra na ve gwellaet, ha beteg ar vue hec'h unan a zeu da vean eun dra drist. Elec'h eta 'n em sevel eneb d'ar boan, anzavomp dija e zo enni madelez, kalz a vadelez.

### III

Ya! Kalz a vad a zo er boan, dreist-holl pa saver beteg bue an ine. War ar poent-man hon do kalz da larout, nann kement da ziazei ar wirione evit da veuli ar vad a had war he hent.

Kentan tra a ro d'imp ar boan ac'h é ar galloud d'en em anaveout ervad. Hec'h unan e c'hall lakât anomp dirakomp hon unan hag e tiskoe d'imp just piou ec'h omp. Laret e zo bet : « An hini na n'eus bet gouzanvet poan ebet, petra a c'houve ? » Gwir eo, na n'ouve netra, ha dreist-holl na oar ket an dra ec'h é red d'ean gouzout arok tra all ebet, da larout é ec'h é bihan, dister, netra, netra nemet eur sklavour etre daouarn e vestr. Mad é klevout ar wirionez war ze, rag ar gistion he deus ar brasan talvoudegez, peogwir diouti ec'h é stag hon doare-bevan e-kenver an dud, ar bed holl ha Doue.

Setu aman eun den, setu aman eur plac'h, o daou e kreiz on-oad hag o nerz : aboe ma oant bugale vihan, ec'h int bet chomet iac'h pesk ; madou o deus hag a diwall anê diouz an holl ezommou ; dindan o dorn o deus kement tra a c'hallfe ober d'ê plijadur ; netra na zo deut d'ober ar c'hontrel dioutê ; ar vue he deus mouz'hoarzet d'ê penn-da-benn. Komzet gantê eur pennadig, hag e vefet souezet bras o welet pegement en em dromplont war an holl dreou ! Ah ! sevel a reont o fenn gwell uhel : sellout a reont en dro d'ê gant eul lagad dinec'h ha faeus ; na gredont ket e c'hallfent teukan war an hent o deus kemeret, ha, dre-ze, e teuont da vean c'houezet gant al lorc'h ha leun a esperans en madelez ar vue hag a gonfians ennê o-unan. Kredi a ra gantê o deus nerz-kalon, met en tenzor a volonte vat a zo kuzet e gweled o ine, pa c'hall dont war benn, a vezevell d'ê o spered.

Neuze na sonjont ken, koulz laret, pegen bresk, dister ha berr-badus ec'h é an donezonou a zo ennê, nag ive pegen aezet ha pegen fonnus an holl vadou-ze a dennont lorc'h dioutê a c'hall bean lemmet digantê.

Met, evit gouzout reiz pegement ec'h int 'n em dallet o unan, sellomp penoz e tigemeront ar boan, pa deu, evit ar wej kentan, d'ober d'ê he bizit : ar pok rust o defe neuze diganti a zihun anê, koulz laret, hag a zigas anê eus a-bell da gemer troad war an douar. Pesort bue a reont neuze ! Souezet e vent, 'n em sevel a reont eneb Doue hag an dud. — « An dra hont, emê, a oa d'imp ! ar madou-ze hon doa droet d'ê ! Lemmel anê diganimp a zo lakât dindan dreid ar Justis ! Gaou a zo gret d'imp ! Hon dic'haoui ec'h é red ! »

Evit lakât sklerijen en o spered, ha divalvenni d'ê o daoulagad, ec'h eo red d'ê ober anaoudegez gant ar boan. An de ma teu ar c'hlenved da ziskar anê ha d'o astenn war o gwele ; an de ma welont skler, evel pa stokfent gant o biz, pegen dister ha dic'halloud ec'h int, na chomont ken ken c'houezet na kent reut : tamm ha tamm e komprenont pegen diskiant e oant o sonjal bean eun dra benag. N' o defe ken kement a boan o plegan dindan an dorn an neus tennet anê eus a netra nag o chom en izelder a galon a zo dereat d'o stad a grouadur.

« Arôk ma koueas warnon ar bar paralyzi an neus gret diouzin ar paour kez den a zo dirazoc'h ledet war e wele, a lare d'in eun devez eur c'hlanvour a



oan et d'e welet, e sonje ganin e oan ken krenv hag eun derven hag e kreden na vije bet biken netra da ziskar anon ha da zont a-benn diouzin. Me a gave d'in em mije trec'het an eil war lerc'h eben eus kement nerz a zo er bed. Hirie e c'houzonn pegen nebeud a dra ec'h on. An den, e gwirionez, na n'ê netra; Doue hepken a zo bras! » Marteze e kavfet, Hon Breudeur Ker, en nevoa paeet ker diski ar gentel a umilite a roe Doue d'ean dre e glenved. Koulskoude, me na gavan ket e oa re ger. Pebez talvoudegez na n'eus ket evit an den bean komprenet diwarbenn Doue ec'h ê Hen an *Hini a zo* ha ni *ar re na n'int netra*, hervez ar gomz a lare Hon Zalver Jezus-Krist da Santez Katel a Sienn. Pa ve komprenet ar wirionez-ze, e ve gwelet ar vue war an douar gant daoulagad all. Arôk, e oa e riskl d'en em goll war henchou treuz; breman eman war an hent a gas da evurusted ar Baradoz.

Evit kement-se, ar boan a verit eus hon feurz anaoudegez vat; ze a zo dleet d'ei evel d'hon gwellan madoberourez. Ar Roue David e unan a zeu da harpan ar wirionez-ze, pa laka e bluen da skrivan ar c'homzouman : « *Bonum mihi quia humiliasti me, ut discam justificationes tuas* ; Pegen mat ec'h ê bet evidon bean santet pouez ho torn, o ma Doue : evelse em eus disket doujan ho justis ».

#### IV

Ar boan a zisk d'imp n'eo ket hepken gwelet pegement just a dalveomp (nebeud kaer a dra e gwirio-

nez), met ive petra a dleomp sonjal diwarbenn an douar ha treou an douar, ar madou, an enoriou, ar plijaduriou. Ober a ra d'imp 'n em zistagan dioutê evit 'n em stagan hepken ouz ar pez a dle gonid hon spered hag hon c'halon, da larout eo, ouz madou, ha na dremenont ket gant an amzer hag a zo dreist muzul ar bed man. Madou a sort-se hepken a zo gret ouz muzul hon c'halon. Ha setu adare eur servij bras a zeu d'imp eur peurz ar boan.

N'eo ket eul labour dister, Hon Breudeur Ker, 'n em zistagan diouz madou ha plijaduriou an douar. Doue a oar pebez beli o deus war hon c'halonou. Ar frealzedigez, a zo stag outê, a zo nebeud a dra, hen gouzout a reomp, ha koulzskoude hon defe poan o trei kein d'ê hag oc'h anzav n'allont ket torri naon hon ine; hag e tizroomp d'o c'havout c'hoaz hag adare, en gortoz da gavout ennê dre sur, eun devez, al levezet wirion hon deus klasket en aner ennê beteg-hen.

Evelse ec'h omp gret : hon natur a doug anomp d'ober fet dreist-holl d'ar pez a ve gwelet, klevet, tanvaet, stoket, en eur gir, d'ar pez a c'hall ober plijadur pe displijadur d'ar c'horf. Kaer an neus treou ar Baradoz bean dreist madou an douar, chom a ra gantê koulzskoude peurvuian an tu koll pa vent lakaet e-kenver gant plijaduriou ar bed man, rag, herve lavar brudet Sant Pôl, madou dudius ar Baradoz biskoaz lagad na n'eus o gwelet, biskoaz skouarn o c'hlevet, biskoaz penn o skeudennet pe o c'horfet. Ar Fe, hag ar Fe hec'h unan, a doug anomp d'o c'hredi, ha kaer an neus hon Fe bean krenv ha birvidik, n'arru ket

koulzkoude da ziskoe anê d'imp peurvuian en eur sklerijen ken skedus, ken ma kollomp ar sonj eus madou an douar.

An darnvuian eus an dud a gav madou ar bed all gwall bell dioutê; e-tuont, n'ouzont ket just awalc'h penoz ec'h int gret; evelse, skler eo, n'all ket o spered nag o c'halon bean douget d'ê. Madou an douar, er c'hontrel, a zo tost d'imp, hag o c'hompren hag o zanva e c'hallomp ober dustu. War ar poent-se, ar madou-man a zo trec'h d'ar re all. War eur poent-all c'hoaz ec'h int gonid warnê: madou an douar 'n em ziskoe d'imp, ar gwellan ma c'hallont bean, gant eun diavez livet brao kaer, ha c'hoantus kenan; madou an nenv, int, n'allont 'n em ziskoe da zaoulagad hon Fe nemet dre gourc'hemennou sec'h ha reut hon deus senti outê d'ober. Ac'hanta, na blij ket d'imp-ni e ve digaset d'imp da sonj re alies eus hon deveriou a sentidigez hag a zoujans; hag e klaskomp, pa lezomp hon natur ganti hec'h unan, trei diwar ar pezh a zigas d'imp ar sonj anê.

Giriou henvel ouz ar re-ze a zo bet koueet diwar bluen ar Barz, pa skrive, 'n eur gomz eus ar bar a esperans a oa deut da laouennât ar bed holl pa c'hanas Hon Salver: « En despet d'imp, emean, war zu an nenv e renkomp trei hon daoulagad. » En despet d'imp! Pegen gwir ec'h ê ar gir-ze! Nann, e gwirionez, n'eo ket a galon vat peurvuian e sell an dud ouz an nenvou; hen ober a reont, met dre red. Koulzkoude, n'ez eus ket da larout, o sellou a dle bean troet trezeg

ar Baradoz dalc'hmad, hep ehan, mar gallont, rag ouz o doare-bevan war ze ec'h ê stag talvoudegez o bue hag o evurusted peurbadus. Pegement a c'hrad-vat eta na dleont ket kaout evit an dra a rei d'ê sellout ouz ar Baradoz! Met pehini eo an dra-ze? ar Boan, Hon Breudeur Ker, ar Boan ha hi hec'h unan, pe ar boan-gorl, pe ar boan-spered, pe ar boan-galon.

Kement den a zo a zoug en e galon eun ezomm ken koz hag hen ha trec'h d'ean, an ezomm da vean evurus; an ezomm-ze a dalc'h da vroudant d'ean e spered ha d'hen lakât da glask hep ehan an evurusted. Met gant ar brez a zo warnan d'he c'hlask, alies na wel ket an treou evel emaint, na wel nemet o flusken, evel ec'h omp a baouez da larout. Mont a ra eta da c'houlen evurusted elec'h e sonj e tleje bean, met na gav ket anei eno: pa nefe tennet ar blusken diwar an treou ha tanvaet anê, e chom war e galon eur blaz souezus, dous ha c'houero, hag a ra poan ha plijadur war an dro. N'ez eus ket roz hep drein, hag alies ar boan a ra d'imp an drein a ve trec'h d'ar blijadur hon defe eus c'houez mat pe gened ar rozen. Ha pesort kelennadurez a zo kuset dindan gement-se? Na gompren ket ervat adaleg an de kentan, rag ar gentel ac'h a re a-benn d'e natur evit bean komprenet an têt kentan. Hag e ra neuze evel ar wenanen: ar wenanen a ninj, ha prez warni, eus an eil bleunen d'eben da chutât ennê an danve-mel. An den ive war an douar ac'h a, evit kavout mel an evurusted, eus an eil tra d'egile da danva anê. Met kavout a ra warnê holl, gant eur blaz

eun tammig dishenvel, ar memes dic'hout, eun dic'hout c'houero; koulzkoude e talc'h c'hoaz da glask, hep kavout biken ar blijadur leun eman e galon o c'houlenn.

Goude eur pennad amzer, kaer en deus ober, ec'h è red d'ean anzav e gwirionez n'ez eus ket a levezeg hep tristidigez, a enor hep karg poanius, a vignoniez hep trubarderez : nann, n'ez eus netra a barfet war a douarn.

Koulzkoude an den, gant holl ijin e spered hag holl nerz e ioul hag e galon, a fell d'ean kaout an evurusted parfet ; ezomm an neus anei, ha n'all ket tremen hepi. Neuze, d'ar fin, e teu ar wirionez da sklerijenni e spered ha da sederat e galon : peogwir ar bed holl n'all ket rei d'ean an evurusted eman o klask, ha koulzkoude ec'h è red d'ean he c'havout, e sav e zaoulagad war zu Doue.

Met na nije ket sonjet sevel e zaoulagad ken uhel, ma na vije ket bet dalc'hmat birrou ar boan o vroudenn anean d'bel lakât da zizrei diwar ar plijadurioù a fell d'ean chom da bleustri. Tud sôf-kont n'o deus kavet, dindan an holl blijadurioù o deus kemeret, nemet tristidigez ha, dre-ze, goude bean laret gant Salomon, pa deuas da welet sklêr war dreou ar bed : « *Vanitas vanitatum et omnia vanitas* ; avel, avel c'hoaz ha netra nemet avel », o deus achuet gant oberour santel Imitation Jesus-Christ, 'n eur larout : « nemet karout Doue hag hen serviji e-unan ; *præter amare Deum et illi soli servire.* »

Ma nije bet kavet Sant Augustin peuc'h hag evurus-

ted evit e galon aman war an douar, na vije ket bet et d'o c'hask e Doue ; hel larout a ra d'imp hen e-unan, pa skriv : hon c'halon na gav ket diaze ar peuc'h nemet ennoc'h, o ma Doue ; *Irrequietum est cor nostrum, donec requiescat in te.* »

Met 'n em skei etre divree'h Doue, kavout Doue ac'h è ar brasan eus ar madou ; ar pezh eta a ro d'imp ar vad-se a zo talvoudek dreist-muzul. Ha setu perag ar Skritur Sakr a gan ken uhel meulodi ar Boan, hag a lavar hag a adlavar d'imp : « Evurus an den a dremen dre ar boan, *beatus vir qui suffert tentationem* ; evurus ar re a ouel, *beati qui lugent* ; evurus ar re a c'houzanv poan eus peurz an dud fall, *beati qui persecutionem patiuntur*, etc... » Setu perag ive eur Barz eus Bro-C'hall, François Coppée, da ziskoe d'ar Boan e anaoudegez evit ar vad a oa deut d'ean dreizi, a c'hoantaas ober hekleo da gomzou ar Spered Santel er Skritur Sakr hag a skrivas eul levr war « ar Boan vadelezus ». — Nann, na rebechomp ket da Zoue da vean lezet ar boan en hon zouez : kement-se a vije rebechan d'ean da vean kemeret ar gwellan tu da dennan anomp d'e gât beteg ar Baradoz.

V

Anaoudegez vat eta a dleomp da Zoue evit bean roet d'imp donezon ar Boan. C'hoaz e harplomp ar wirionez-ze gant katz a rezoniou mat. En unan eus e brezegennou a veulodi evit an dud varo, Bossuet a

gomz eus « an dra benag ze poellek a ro ar Boan d'an ine ». Gwir eo, ha na n'aller ket hen nac'h ; netra na ro d'an den eur wiziegez ken achu, netra eul lagad ken digor war ezommou an dud all evel ar boan. An hini a zo tremenet dre ar boan hag an hini na n'eo ket e kredfen larout a zo ken dishenvel an eil diouz egile evel deilhou an diskar-amzer ha deilhou an nevez-amzer, pe c'hoaz, ma keret, etre ar gwin koz hag ar gwin nevez. Deilhou an nevez-amzer a zo brao meur-bed ; luc'han a reont gant ar vuë virvidik a zo ennê, ha warnê e zo liou glaz eus ar c'haeran ! Met marteze e c'hallfer rebechan d'ê na zo warnê holl ha war bep hini anê penn-da-benn nemet ar memes liou, unan hepken : krenvoc'h ec'h int evit finoc'h.

Memes tra evit ar gwin nevez : krenv ê, tan a zo ennan, met eun tammig ec'h ê kri ; na n'eus ket eun tanva c'houek, n'eo ket net, hag e liou ive a zo eun dra benag da larout diwarnan. Ar gwin koz an neus kollet eus e nerz ; n'eo ket ken tomm ken, met pebez blaz ha pebez liou ! Perak se ? Dre ma neus, hervez ma ve laret, labouret, ha netaet e roben wenn pe ru, dre ive ma neus labouret an eil war egile an holl dreou a zo oc'h ober anean, en eur gir (da berak n'hel larfemp ket), dre ma neus tremenet dre ar boan. D'ar-boan an neus kemeret, d'ar reuz a zo bet warnan evit gouzanv kement a chanchamanchou e tle e c'halloud hag e dalvoudegez.

Ha deilhou an diskar-amzer, eta ? Perag ec'h int ken kaer ha ken dishenvel etrede ? Perag e lezont al

liverien hag ar varzed sebezet hag estlammet dirakê ? Perag ar re memes n'o deus lagad ebet evit gened ar bed a chom batet ha leun a levenez, pa welont war diskar al loar Here, eur c'hoat en e bez pe eul lodennig dioutan. Al lagad an nefe poan o tistagan diwar ar gwe ken kaer gwisket gant deilhou liou ar mergl, ar c'houevr, an arc'hant hag an aour war an dro ha roudennet ken brao gant gwaziou pe melen-koar, pe glaz-mor, pe ru-gwad. Piou eta a zo tremenet da dro-c'han gant eur bern liouiou ken dudius al liou glaz-ieot a vije gwelet e unan d'an nevez amzer ? Piou, Hon Breudeur Ker ? Met ar boan, sur mat ! An avelaj bras pe griz, ar glaoueiër hirr, an dommder re vras, pe c'hoaz, war ar fin diwean, ar ienien, a zo deut tro ha tro da lakât o merk, merk ar boan, war an deilhouze : e-tuont, ar gwriou o deus sunet nebeutoc'h a sabr en douar, hag ar vue a zo deut da zivaloat er ween ; eun toullad devejou c'hoaz hag an deilhou-ze, hag a zo kaer evel bokedou bleun, a goueo war an douar ; poan o deus, emaint o vont da dremen ; ha setu perag ec'h int ken kaer !

Mac'h eo kont evelse gant an treou a zo hep bue pe war ar bazen izelan eus ar vue, petra na dleomp ket bean e gortoz da welet ebarz an den, peogwir an den a c'hall digemer gant e liberte ar boan a rei d'ei skoa-zel evit ma tougo frouez ? Arôk ma neus bet he bizit, arôk ma neus santet he dorn pouner war e ziouskoa o plantan ennê hec'h ivinou lemm, keit ma oa iac'h pesk, keit mac'h e e gonverz war arôk, keit ma oa douget e

hano ha harpet e vrud gant ar bobl, keit ive ma na oa ket bet c'hoaz e galon dindan ar wask, an den-man a oa skanv e benn, diboell, drouk marteze ha fallakr. Met ar c'hlenved a zo deut, an drouk-chans a zo koueet war e di; ar hunvreou kaer an nevoa gret, pa oa yaouankoc'h, a ve dibennet an eil goude egile, eleiz a boaniou all an neus gouzanvet, ha setu tamm ha tamm an holl boaniou-ze a zeu da dougen o frouez en e galon : dont a ra da vean muioc'h poellek, dousoc'h ; bizaj vat a ra d'an holl hag e garante a zo muioc'h birvidik evit e nesan.

Na wel ken an treou en dro d'ean gant ar memes daoulagad evel arôk. Savet e breman uheloc'h, gwelet a ra pelloc'h, rag ar vrumen a oa dirag e zaoulagad a zo koueet, hag e ver souezet en dro d'ean o welet pegen buhan e kerz war hent ar santelez. Hag-en, Hon Breudeur Ker, n' hoc'h eus ket klevet larout dek gwej, kant gwej, diwarbenn hen-man pe hen-ont : « Ma ! hen-ha-hen n'eo ken ar memes hini. Oh ! pegement ec'h e et war wellât aboe mach e bet tremenet dre ar boan.

Evit ma lod, biskoaz na zo bet digoueeet d'in gwelet kaeroc'h, uheloc'h, tostoc'h da Zoue, evit ineou tud hag a zo bet labouret hag aret beteg ar c'hrimen gant ar boan hag an anken. Eus kador-brezeg ebet n'em eus klevet o tiskenn komzou ken kalonek ha ken kaer evel komzou koueet diwar muzellou tud paour hag a c'hallfer larout dioutê, eun tammig evel ma lavar ar Profet eus Hon Salver, ec'h int « tud a c'hlac'har ». En o mouc'hoarz e zo eun dra benag eus an nenv ! Hag o sellou eta ! pegen skedus ha pegen doun ! Pa

weler tud evelse, e sonjer emaint dija o chom er bed all, met ec'h int manet war an douar, evit ma tiskoeo an ine, a-dreuz d'ar c'horf chomet stag outi, ar gened he deus bet digant Doue.

Larout a refet marteze : kement-se a zo kaer meur-bed ; met an dud-se n'emaint ket stank war an douar. Setu aze ineou kaer ar pezh a garfet, met n'ez eus nemet hiniennon anê, ha da berak neuze larout ec'h e mat ar boan evit an holl ?

Hon Breudeur Ker, ma n'ez eus nemet hiniennou eus an ineou-ze, n'aller ket hen tammall d'ar boan. Rag ar boan, dre he nerz hec'h-unan, a vout war an ine evit ma krapo war menez ar zantelez. Pa n'ar-ruomp ket war lein ar menez, ec'h e dre ma n'hon deus ket lakaet en he servij hon bolonte vat, dre ma stourmemp outi. An de ma komprenomp petra e, an de ma teurveomp digemer anei, nann evel eun enebourez ha gant ar c'hoant d'en em venji, met evel devejerez an O. Doue, deut da ober ennomp he labour a silvidigez, an de ma plegomp d'ei ha ma sikouromp anei, an de-se e toug ar frouez ac'h e galvet da dougen deus peurz ar C'hrouer : tamm ha tamm, neuze e savomp a-us da dreou an douar, beteg dont da vean henvel, koulz larout, ouz an êle. Ha c'hoaz e klemm-femp ? Hag e kredfemp mallozi warni ?

## VI

Ma n'all ket ar pezh am eus laret bete vremen sklerijenni ho spered diwarbenn madelez ar boan na magan

en ho kalon karantez eviti, e zo c'hoaz rezoniou all a-du ganti hag a-du gant Doue.

An den, siouaz ! na ra ket dalc'hmat evit ar vad impli eus an donezon gaer a zo gret d'ean eus al liberte. Alies e tro e ijin war ar fall hag an droug a ra a renk bean paeet, hervez ar justis. Met penoz hen paean ? N'ez eus ket kant stumm d'hen ober, n'ez eus nemet unan : ober eun dra benag hag a goust d'imp hen ober. Met, hel laret hon deus c'hoaz, na n'eomp ket da red na dre blijadur trezeg ar pez a goust d'hon natur. Ac'hanta, dre natur, e tizroomp diwar ar boan, al labour start, ar sakrifis, ha sur mat, ma vije lezet pep den da gemer pe da lezel hent ar binijen war an douar, al loden vrasan anê na gemerfent biken an hent se. Ha koulz Koude, red eo ober pinijen, da baean skoden ar pec'hejou ! Neuze eta e tigouezfe d'an darnvuian eus an d'ud mont d'ar bed all hep bean paeet o dle da justis Doue, hag e renkfent, rag ar dle-ze na ve ket pardonet, e baean er bed all.

— « Pe er bed-man pe er bed all, e larfet marteze, na vo bepred da baean nemet ar memes dle ! Hag ec'h è èzet da gompren e stourmer da baean ar pellan ma c'haller ! » — Ha me a lavar, Hon Breudeur Ker : epad ar vue-man, ha nann epad eben, e vank paean ar dle-ze. Perak ? Met hervez kelennadurez ar Fe, dre ma vo gwasoc'h ha startoc'h ar binijen er bed all evit n'all bean er bed-man. War an douar, madelez an O. Doue a zeu d'hon sikour ; er bed all, na vo madelez na pardon ebet ken : red e vo paean, hervez parabolen an Aviel, beteg ar santim diwean.

Aman e vemp sikouret da baean hon dle : na vemp kammed hon unan dirak Doue, ar gwir barner : dre Gomunion ar Sent, hon deus eus hon zu, ar Werc'hez glorius Vari, ar Sent hag holl ineou an douar a blij da Zoue : droet hon deus da gemer eus tenzor o meritou, ha pinvikat gantê hon faourentez.

Er bed all, na vefomp nemedomp hon unan, dilezet gant an holl e kreiz hon anken.

Pebez gonid eta evidomp ober pinijen war an douar. Sonjomp eta pebez madelez an neus Doue en hon c'henver oc'h ober d'imp gouzanv poan war an douar ; n'oull ket lezel anomp da drei diwar ar binijen, evel e rafemp awalc'h dre leziregez. Torri a ra hon chaden-nou en despet d'imp.

Alies e tigoezfe d'imp klevet tud hag o deus bet ar glac'har da welet hini pe hini eus o c'herent skubet gant ar maro, o larout komzou evel homan : da vihanan, eme, ar pez a gonfort anon, ac'h e sonjal ec'h e maro hep poan. Setu aze komzou, hag a goue, e gwirione, eus eur galon dener, met, goude ar pez hon deus laret, hag-en, Hon Breudeur Ker, na ziskoeont ket pegen nebeud e kompren mad gwirion an ineou ? Ha pa ve sonjet er varnedigez, pebez konfort o sonjal an nefe gouzanvet ar c'hlanvour, arôk mervel, poaniou bras ha gouzanvet anê evel eur c'hristen mat. Me ho ped, n' et ket da vuzuli madelez an O. Doue ouz ar poaniou a espern d'imp. Ar c'hontrel a c'hoarve alies : neuze, seul vrasoc'h e ve e vadelez, ha seul bouneroc'h ar groaz a ve sammet war e ziouskoa.

## VII

Gallout a rafen breman tevel ar madou all a denomp eus ar boan : ar re am eus komzet anê a dlefe lakât en hon spered ar sklerijen diwarbenn ar boan hag en hon c'halon karantez eviti. Koulzkoude, kredi a rafen na vijen ket just en he c'henver, ma na gomzfen ket eus unan eus he madelezoù hag a ro d'ei eun dalyoudegez dispar.

Lemmet ar boan diwar an douar, hag e lemmet ganti ar re gaeran eus ar vertuiou e-touez an dud, ar re a ziskoe, dre o c'houez mat, ar pezh a zo ar gwellan en hon c'halonou, da larout eo, an drugarez, an druez, ar c'hradvad, ar vadelez, ar garantez, an donezon eus ar vue. Muioc'h evit an nerz, muioc'h evit ar spered, muioc'h evit ar skiant, ar wiziegezh hag an ijin, ar vertuiou-ze a ra hon enor hag a ro d'imp hon zalvoudegez, rag muioc'h evit an treou all-ze, e sikouront anomp da ankouât fallagriez ar bed hag a harz anomp da gemerkasoni outan. Klaskomp an dud o deus gret ar muian a enor d'o gouenn hag o deus goneet hon c'halonou, hag e kavfet penoz an dud-se ac'h è ar re eman ennê skedus evel an heol ar vertuiou kaer-ze. Perak an dud dife a douj kement Hon Salver Jezus ? Petra eta a zo en Jezus hag a denera hag a stag outan an holl c'halonou ? E c'halloud hag e vuzudou ? Nann da. — E furnez burzudus ha kaerder e gellennadurez ? Nann ive, met hepken e vadelez, e vadelez dreist-muzul, bepred war evez ouz hon foaniou, aketus e kenver an

holl, evit o c'honforti, o iac'hât, o adsevel. Setu aze ar pezh a dalve da Jezus eus peurz an holl dud doujans ha karantez.

Met evit kaout truez ouz unan benag e tle bean ennan eun dra benag dign a druez, dienez pe anken ; evit sonjal ober ar vad d'eun den, ha 'n em lakât d'hen ober ec'h è red da heman kaout ezommou. Lakaomp eur bed elec'h na zo na poan nag anken, nag ezommou na dienez, ar vadelez na gav ken toull ebet d'en em ziskoue, an dud n'o deus ken netra hag a c'hallfe lakât anê da deurel evez an eil d'egile, da ziskoue o c'harante an eil d'egile ; barnet int da vevan an eil e-kichen egile, hep ober fet an eil d'egile, pep hini evitan e-unan. Ha petra a c'hoarve d'ar fin ? netra a gaer, e gwirionez : ar vue, e neb lec'h, na zo warni blaz ebet. Oh ! gwelloc'h è ar bed gant ar boan hag ar frouez kaer a ziwan dindan he fajou !

## VIII

Bete vremen hon deus komzet, evel pa vije mat tammall da Zoue an holl frouez a vizer an neus hadet ar boan e-touez an dud. Ha dija n'hon deus ket bet re a vec'h o tifenn anean diouz ar rezoniou paour savet da nac'h anean, war digare ma vije eun Doue, n'allfe ket bean madelezes.

Deut è ar c'houlz breman da zigas da sonj ne vije ket mad na hervez ar wirione tammall da Zoue an holl boaniou hon deus komzet anê, met red è d'imp tammal kalz anê d'imp hon-unan. Ya ! an dud a zo

bourevien e-kenver an eil d'egile hag e-kenver int o unan. Aezet mat eo hen diskoe evit ar pezh a sell ouz ar boan-galon hag ar boan-spered. Pelec'h eman mammen ar poaniou-man ? Ar boan-galon hag ar boan-spered a zeu d'ober o nez en hon ine pa na gompren ket hon nesan anomp evel m'eo dleet, pa ve taget gant ar warizi, pe gred ozan gevier da zispenn hon brud, ha kant ha kant tra all evelse.

Lakaomp e vije an holl dud leun a vadelez, a c'hradvad, a garante, bepred aketus, eus ar beure evel eus an noz, da renti evurus o amezeien, pelec'h e c'hallfe chom plas en ine an den da lojan ken na poan-galon na poan-spered ? Met ma n'ê ket an dud holl evelse, da biou tammall ? Da Zoue ? Sonjet eun tamm ! Hag-en Doue na c'houll ket digant an dud pratikan e-kenver an nesan an holl vertuiou-ze ? Neuze eta n'eo ket Doue a dleomp tammall, met ni hon-unan. Hon foan-galon kenkoulz hag hon foan-spered a zo frouez hag a zeu war eün eus hon disentiñgez da volonte Doue.

Hag ar pezh a laran eus ar boan-galon hag ar boan-spered, hel laran ive evit ar boan-gorf.

Bean zo eur bla hanter pe war dro, en em gavas etre ma daouarn eur gellaouen skrivet gant hag evit skolaerien ha skolaerezed ar C'houarnamant. Kemer a ris ar boan d'he digori, ha war eur bajen elec'h e oa skrivet e lizerennou bras. « A dôliou pigel », e chomis nann souezet, rag eur peurz eur galaouen evel honnez netra n' alle souezan anon, met glac'haret o lenn ar

pennad skrivet eno. Er pennad-se e oa gwall-gaset ar wirionez diarbenn Doue gant rêzoniou skanv met giriou pouner ha diskiant. An hini an nevoa skrivet anean a zisklerie krak n'alle bean Doue ebet, peogwir e zo bet brezel, eur brezel didruez, ha d'he heul, poaniou diniver hag anken spontus, ha peogwir ive e ve gwelet kement a vugale vihan ken koant ha ken glan o vervel e kreiz poaniou ken euzus !

Achui a ra e bennad 'n eul larout, c'hoant c'hoaz d'ean d'en em ziskoe eur potr jentil, ma talc'hfe an dud bepred da anzav e zo eun Doue, e c'houll evitan e-unan da vihanan an droet da wapât anean. Paour kez den diskiant ! N'oullin ket diganac'h, Hon Breudeur Ker, gwapât an den-ze, rak rêzoniou evel e re an nefe an nen kentoc'h truez outê evit malis.

Ma karfent sonjal eur pennadig, hen hag e vignoned ! neuze e teufent da welout da betra pe da biou e tleer tammall ar poaniou eman o klemm warnê. Ya ! Lakat ar brezel ha kement drouk ha fall a zo deut d'he heul, war gont an O. Doue ! Perak ? Neuze ec'h ê Doue an neus diskleriet ar brezel, hag an dud o deus renket 'n em lac'han etrede evit ober plijadur d'ean ? Koulz-koude, eus an diou gosteen a oa o 'n em gannan, e zo bet klasket piou eman war e gonsians torfed euzus ar brezel. Met bete vreman n' an nevoa sonjet den ebet mont d'e glask d'ar Baradoz, met e-touez an dud war an douar. Rak, an dud a skiant n'ankouaont ket en neus difennet Doue en e c'hourc'hemennou d'an dud 'n em gannan ha 'n em lac'han. Na lavar ket d'ê :



« lac'han a ri », met : « na lac'hi ket » ; na lavar ket d'ê : « kasoni az tevo ouz da nesan », met : « karout a ri da nesan evel d'out da unan, kaeroc'h so, evel don-me, hag e vadou a lezi gantan. Hag en Aviel, Hon Salver a lavar d'imp e sell e Dad evel gret d'ean e-unan ar vad pe ar fall a ve gret d'an disteran eus e vugale war an douar.

Ma karje an dud bean kemeret kuzul digant Doue arôk lammout an eil gant egile d'e dagan, ma karje ar re a zo o c'houarn ar poblou pedi anean gwej ha gwej all da sklêrijenni o spered ha chilaou e vouez, na vije bet biskoaz brezel. Hag eur wej krog al lac'ha-deg, ma 'dije teurveet holl trei d'e gât eur sell a anken, o dije raktal holl a-unan paouezet ar brezel.

Nann, ar brezel n'hall ket bean tammallet da Zoue ; ar brezel n'eo ket deut eus tre daouarn Doue : mac'h ê bet diskleriet, mac'h ê padet keit, ma zo bet gret enni treou ken spontus, ec'h eo hepken dre ma neus lakât ar poblou dindan dreid gourc'hemennou Doue. Hag an hini a dammall ar brezel da Zoue an nije gallet kenkoulz all tammallet d'ean holl bec'hejou e vue e-unan. E bennad-skrid na vije bet na welloc'h na falloc'h.

Eun dra koulzkoude a larfet e chom war ho spered : Doue an nije gallet harz an dud d'en em dagan. Da berag en neus lêzet anê d'ober hervez o fenn ha da vernian war an douar ken bras gwalleuriou ? Da berag, Hon Breudeur Ker ? Setu aman : Doue an neus roet d'an den donezon gaer al liberte ; met na oa ket

awalc'h rei d'an den an donezon-ze, dereat e oa ive rei d'ean an impli anei. Petra eta a deuje da vean al liberte-ze, ma lakaje Doue e c'halloud da harz anei da labourât pep gwej pa vije a-neb d'e volonte ? Kenkoulz larout na vije ken a liberte. Met hag-en na gav ket d'ech e vije eneb ar vad e-unan harz anomp da amanti eus an oberou fall hon deus gret ?

Ha, ma vije kont evelse, piou a rofe d'imp da c'houzout pegoulz e vije red dizrei war hent ar gourc'hemennou, evit derec'hal goude da vont eun war arôk ? Just ê ha mat ive, peogwir ec'h omp krouadurien libr, e paefemp skoden hon fec'hejou hag e tastumfemp frouez hon oberou mat.

Memes tra a vije da lavarout diwarbenn an eil tra a gomz anean potr « e dôliou pigel », da stlapan anean gant Doue, diwarbenn eta maro ar bugelig bihan glan ha direbech e kreiz ar poaniou euzusan. E gwirionez, Hon Breudeur Ker, eur rann-galon ê gwelout ar c'hrouadur bihan-ze o wean e dammig korf da stourm ouz ar maro, ha koulzoude na n'eus ket gallet c'hoaz ober pec'hed ebet e neb feson ! Met dirag ar c'havel elec'h eman têt ar maro dizale o vont da astenn anean, da biou e tammallet ar gwalleur-ze, da Zoue pe d'an dud ?

An den kentan hag ar wreg kentan, Adam hag Eva, a oa deut eus tre daouarn o C'hrouer iac'h-pesk a gorf ha bet gantê ar pez o devoa ezomm evit 'n em diwall diouz ar risklou bras a oa en dro d'ê.

Deus pelec'h ec'h ê deut ar c'hlenvejou ? Deus troiou

diskiant pe oberou fall gret gant an dud pe, c'hoaz, dre fôt a deurel ple. Kemeret ar boan da welet piz ar gision penn-da-benn : kleuzet anei ha klasket ervat enni beteg hé diaze, hag e wellfet skler e teu ar c'hlenvejou eus hini pe hini eus an ter mammen-ze.

Setu aman, ma karet, unan eus ar c'hlenvejou ar muian spontus war an douar, unan eus ar re a gas d'ar vered ar muian a dud, klenved an dud peultriner. Ganti e ve dismantret peb bla kement a diegez ! Ac'hanta eus pelec'h e teu ? Ma c'houllet digant ar medesin, e lavaro dustu : eus pelec'h e teu ? deus evan re a evaj krenv, deus bean lojet fall, deus kemer plijaduriou direiz, ha deus ober treou all diskiant. Ha breman e c'houllan diganech : n'efet ket marvat beteg larout penoz, ma teuer da dêvi en e diabarz 'n eur lonkan re a evaj krenv, ec'h ê da Zoue e tleer hen tammall ? ma zo koz tie fall ha gleb, ec'h ê Doue an neus savet anê ? ma kemer an dud plijaduriou direiz ha ma reont treou all diskiant, ec'h ê da Zoue e tleer ober rebechou ? Kement tra direiz, kement tra diskiant, kement tra diroll a zo difennet gantan : n'eo ket eta hen a dleer tammall, ma teu an ter mammen-ze da ziskargan poan hag anken en ine an den. An den na nevoa d'ober nemet diwall diouz ar pezh a oa difennet d'ean gant Doue, ha na vije ket c'hoarveet gantan ar pezh a zo digouee. Ar c'hoz-tie, ar c'hloten-nou, n'o deus nag er na sklerijenn ; met Doue a ro d'imp er ha sklerijenn, peb hini ar pezh a gar, hag evit ma c'hall eun ti bean hep er na sklerijenn, ec'h eo

red serri an nor ha tremen hep ober warnan prenechou.

Evit ar pezh a sell ouz ar c'hlenved 'an « alcoolism » e hano, gouzout a ret e teu eus evan re a evaj krenv. Met an evaj krenv na ve ket kavet gret ha tout er bed : n'ez eus war an douar feunteun win-ardant ebet. An evaj krenv a ve gret gant an dud. Ha neuze, hag e vije kavet mammennou evaj krenv tu pe du, bepred e vije red mirout gourc'hemenn Doue a zifenn ober korfadou. E-touez an dek gourc'hemenn e zo unan ispisial evit diwal bue an den, ha ma vije heuilhet, ar vue a vije miret. Glac' haret oc'h o welout e zo kement a dud peultriner ; troet da gât an den e-unan ha gret d'ean ho rebechou.

Mat kaer, a larfet d'in, met hag-en n'allfe ket Doue harz an troiou diskiant, an oberou fall hag an oberou gret dre fôt a deurel ple da dougen frouez a boan hag anken evit an den ? Oh ! Hon Breudeur Ker, ha bean e vefe unan benag, e gwirionez, da vean souezet o welet e lez Doue an treou evel emaint ? Ma lez an treou evelse, hag-en n'eo ket evit diski d'imp kaout urz, bean war evez, ha ren eur vue vat ? Hag-en ec'h ê dereat rebechan d'ean da vean disket d'imp pegen brao e vo bean war an hent a ro d'imp da heuilh, met ive pegement a geun hon devo, ma trofemp diwar an hent-se ?

Marteze koulzkoude e larfet c'hoaz : Ya ! gwir eo, an hini a lez en treou da vont vel ma teufont e teufont, an hini a ra eun dro diskiant pe eun dra fall benag,

a dle dougen poan o oberou direiz : eno n'ez eus netra da lavarout nemet meuli justis an O. Doue hag ive e vadelez. Met, pa droomp hon sellou war ar bugel bihan a gomzemp anean, hag a zo ken yaouank, ken dinerz, ken didammall, pa wellomp pegement a boan a c'houzanv hep bean koulzkoude gret netra a fall nag a diskiant nag ive dre fôt a deurel ple, neuze ec'h e red d'imp sonjal eman ar c'hrouadur-ze o paean 'vit re all, ha setu ar pez a zo trec'h d'hon spered.

War ar poent-man, Hon Breudeur Ker, na glaskin ket rezoniou hirr ; na rin nemet goulen diganae'h eun dra : pa ve kistion, nann eus madou ar vue hag ar iec'hed, met eus ar madou all, ar binvidigez hag an enor, hag-en e zo deut biskoaz en ho spered ar sonj da dammall da Zoue an dienez hag ar baourentez a zo lod ar bugel, adalek ma teu war an douar, pa nefe ket dastumet e dud madou pe pa o defe fontet anê ? Dont a ra d'ech ive sonj da dammall da Zoue an dezenor a goue war ar bugel-ze hag e heuilh epad e vue, dre ma neus kollet e dud o enor ? Nann sur, na deufe ket d'ec'h ar sonj da rebechan da Zoue kement-se. Truez ho po ouz ar bugel, met diskiant e kavfec'h an hini 'n em savfe eneb da Zoue war an digare-ze. 'N em sevel a ret eneb d'e dud, ma deus kollet o enor, d'e dud pe da eun den all benag, mac'h int deut da vean paour.

Perak neuze klask rezoniou all, pa ve d'ober komz eus klenved pe maro ar bugel ? N'ez eus nemet eul lezen, ha nann diou, da ren madou ar iec'hed hag ar madou all. Koulz hag ar re-man, madou ar iec'hed a

zeu d'imp dre hon zud, evel emaint ennê, divoulc'h mac'h int bet miret divoulc'h, kresket, mar o deus bet ar furnez d'o c'hreski, koac'het, mar o deus bet ar fol-lentez d'o c'hoac'han. Ma na weler ket madou ar iec'hed en eur bugel, da biou eta tammall kement-se ma n'eo ket d'ar re a oa arôk d'ean war an douar hag o deus roet d'ean bue. C'hoant ho pije eus eul lezen nevez ? C'hoant ho pije e teufe Doue, pep gwej ma c'hanfe eur bugel da rei d'ean ar pez a vankfe d'e iec'hed dre fôt e dud ? Perak ive na c'houllfe ket digantan dont da adsevel an enor mastaret pe ar binvidigez kollet ?

Ha gwelout a ret ar pez a vije e kement-se, eneb d'an natur, peogwir e torfer ar chaden a stag ar vugale dre o zud ouz o zud-koz hag o gouenn a-bez, ar chaden-ze ha n'ez eus nemeti da derc'hel mibien Adam war hent ar furnez hag ar vertu ? Na vije ken kement a riskl d'en em lezel da vont da ren eur vue fall. Da berag, e gwirionez, ober gwad fall, a lavarfer, peogwir ar pez a vo dispennet pe dismantret dre hon dizurzou a vo adarre adsavet ?

Sur on, Hon Breudeur Ker, n'allet ket mont eneb d'am rezoniou. Nann, nann, Doue n'all ket bean tammallet d'ean, e gwir, ar fall hag ar poaniou a bep sort a samm kement den war an douar, peogwir ec'h e an dud o unan a wint ar bec'h war o chouk.

## IX

Ha breman ar poaniou a grog en den, hep bean bet lasket nag eus a-bell nag eus a dost, ec'h e red an-

zav e kemer re alies aon diouté hag e kresk ané kalz re. Digoromp hon daoulagad hag e welfomp e tisk d'imp ar skiant-prenan an dra-man : seul vni e vemp hegazet gant eun dra benag pe en imor fall, seul wasoc'h e kavomp ar boan a goue warnomp, dreist-holl ma teu, war ar marc'had, hon spered da labourat diwarbenn hon stad. Ac'hanta, petra a ra al loden vrasan eus an dud pa zeu ar boan da stokan outé, pe memes pa welont e tosta d'è ar boan ? 'N em reudi a reont, ar gounar en o daoulagad hag en o c'halonou, ha komzou a valloz hag a dizentidigez var o muzellou. Ha petra a c'hoarve neuze ? ar pez a c'hoarve pa ve lakaet dour krenv war eur gouli : dour-krenv ar gounar hag an dizentidigez a grign a-nebeudou ar gouli gret en ine gant ar boan, ha bemde ar gouli ac'h a war greski ha war denerât. Peurvuian, dreizi hec'h unan, ar boan digemeret gant eun ine sentus ha hegarrat a vije nebeud a dra ; met pa glasker enebi outi, e teu da vean re bouner. Bean zo potred ha merc'hed hag e ve a-wejou lavaret diouté e c'houveont an tu d'en em vourrevian. Larout a rafer n'o defe biken achu da sunan ar blaz c'houero a zo war o foan. N'o deus lagad ebed ken nemet evit homan : he mēran a reont, trei ha dizrei a reont anei en o c'halonou da sellout outi bepred da welout hag-en e zo enni eun tu benag c'hoaz c'houero da danva.

Da vihanan, ma 'n em gontantfent da vuzuli ha da vuzuli adare ar boan a zo breman o heskina d'è o c'halon, met red è kredi n'eo ket awalc'h ze d'è ;

ezomm o deus da lakât warni poaniou all : klenved ar c'hoant-poan a zo krog warné, kas a reont o spered da envori beteg an amzer pell-dremenet, ha da labourât war an amzer da zont, hag e charreont evelse beteg an amzer a vremen ar pez a c'hallfe adneveât ha gwasât o foaniou ! Na oan ket eta e kreiz ar wirionez, pa laren bremansouden ec'h è ni hon bourrevien ?

X

Oh ! Doue a zo welloc'h evit an dud evit na n'eo an dud evité o-unan. Eman en o c'henver evel Hon-Salver e unan, pa lare ar c'homzou kaer-man euz an Aviel : « *venite ad me omnes qui laboratis et onerati estis et ego reficiam vos* ; deut d'am c'hât, c'houi holl hag a zo poaniet fïa sammet, ha me a rei konfort d'ec'h ». Hon Salver a dizamm ar galon, a dousa ar boan, a iac'ha ar gouli. Kement den a deurve sellout d'e gât, kement hini a briz chilaou e guzuliou, a sant raktal e vadelez, rak kerkent eur samm pouner a goue diwar e spered ; sonjal a ra gantan e zo tremenet war e dal eun dorn dousoc'h evit hini eur vamm da skuban diwarnan an derjen.

Ha gwelet hoc'h eus bet, gwej pe vej, tud o chom e kreiz ar peuc'h, eur mouze'hoarz a levenez war o muzellou, dindan an tôliou skoet gant morzel ar boan hag a sonje kentoc'h gant an den e tleje bean bet bruzunet d'è o c'halonou ? Mar ho pije goullet digante piou an neus diskoeet d'e alc'houe ar peuc'h hag an evurusted ha roet d'è nerz da virout

bepred an daou denzor-ze, o dije lavaret d'ec'h : piou ? Hen, Jezus. Kalz welloc'h c'hoaz ec'h ê Hon Salver e-kenver ar re en em sko etre e zivrec'h. Ken bras chanchamant a zigas en o foaniou ken e ra dioute joaiou dispar. Hag-en Sant Pol na n'eus ket skrivet e oa beuet e galon a evurusted e kreiz e drubuihou ? Hag ar verzerien, daoust hag-en na diskoeent ket ar brasan levez e kreiz ar poaniou euzusan ? Hag-en n'hoc'h eus ket kavet tro pe dro war hoc'h hent tud ha na seblante o bue bean nemet eur groaz hag eur verzerenti penn-da-benn, ha koulz koude e trugarekaent Doue eus o stad evel eus eur c'hras kaer roet d'ê, hag e kanent, koulz lavarout, o evurusted ? Ah ! pegen skedus, e gwirionez, e vije neuze o dremm gant al levez !

Ha koulz koude n'hon deus ket c'hoaz klozet ar pezh a zo da lavarout diwarbenn ar boan. Ar boan, hag a sellomp anei evel eun dra fall, ha memes evel ar fallan tra a c'hallfe bean, a denn Doue diouti ar vad, eur vad hag a zo dreist da vadou ar bed man, eur vad hag a bad da viken hag an neus eun dalvoudegezh dispar.

Gouzanvet a-unan gant Hon Salver ha dre garante evitan, ar boan a doug, dreizan, er Baradoz frouez ken kaer ken e chom ar spered dilavar dirakê. Ar sent o deus komprenet talvoudegezh ar boan hag ec'h arruent ha n'allent ket bevan hep gouzanv poan. Lavarout a rent evel Santez Tereza : « Pe bevan er boan pe mervel ». Komzou evelse marteze e kemerfet anê evit komzou diskiant, ha koulz koude ennê eman ar c'haeran skiant, Hon Breudeur Ker.

Karout ar groaz a zo bet tremenet a viskoaz evit eun dra diskiant gant an dud stag o c'halon ouz madou an douar-man. Ac'hanta ! nann ! ar garante-ze n'eo ket eun dra diskiant ; ar c'hontrel eo, ar brasan furnez a zo enni. Komzou Santez Tereza, o deus roet kof d'eur menoz, an hini hepken a dle dont eus kalon an den, pa wêl pegement e vo dic'haouet er Baradoz ar boan an nevo gouzanvet, pa wel ive pegement a boan an neus gouzanvet Mab Doue deut war an douar d'hon frenan ha da ziski d'imp ren hon bue.

O poan, nann, n'out ket an dra spontus hag euzus a c'hoanta lavarout, e kreiz o mallozou eneb Doue, ar re n'oullont ket sevel o daoulagad a-us da vadou ar vue baour-man ! Ma teus eur fas ken spontus evitê, ec'h ê dre m'o deus da gentan dic'hizet anout. E sked sklerijen an O. Doue ec'h out bras, ec'h out kaer, ec'h out mat ! Nann, n'out ket gret evit 'n em sevel eneb Doue d'e ziskar, n'out ket eun testeni eneb e vadelez ! An dud eo o deus, dre o fec'hejou, astennet da rouantelez ; an dud eo a ro d'az tôliou ar pezh a zo ennê a c'hlac'har hag a anken. Ma teues da vean fall, ec'h e dre o fallentez a zo dislivet warnout. Doue na soursi diwit nemet evit diskoe e garantez. Skanvât a ra anout, skuilh a ra e vadelez da dousât ar vlaz c'houero a zo warnout, rei a ra d'it eun diavez da blijout, goude bean lemmet diwar da dremm ar pezh a zo re c'haro. Dreizout e ra kalz a dreou a zoare : ober a ra d'imp

labourât ha trei kein d'al leziregez; distagan a ra hon c'halonou diouz an treou a dremen, diouz madou an douar, evit sonjal er pezh a zo dign diouzimp, er vue pourbadus; sevel a ra anomp a-us d'imp hon unan; rei a ra d'an ine brasoc'h beli war ar c'horf; skrivan a ra en hon ine skeuden e vadelez hag e garantez; ober a ra d'imp paean ar skoden evit hon fec'hejou, hag e tiliamm anomp e-kenver e Justis; lakât a ra anomp da zastumm er Baradoz kement a vadou ken hon devo ezomm eus an eternite da drugarekât anout da vean roet anê d'imp. Ah! pebez madoberourez ec'h out! Pa sonjomp ennout, n'az pezh ket a aon e savfe biken diwar hon muzellou war zu Doue giriou a gasoni hag a valloz: d'e gât hen evel d'az kât te n'hon devo nemet eur vouez, mouez an anaoudegez vat hag an doujans, rak bean ec'h out eul labourerez dispar evit ar silvidigez.

Ha neuze, aboe naontek-kant vla ec'h out savet a-us d'an douar. Ar C'hrist an neus briataet anout hag ar pok birvidik an neus lakaet war da dal blonset, an neus lezet war da dremm eur sklerijen ken divin ken ma n'allomp ken tremen dirakout nemet evel e tremen-femp dirakan e-unan, 'n eur blegan hon fenn izel izel gant doujans, anaoudegez vat ha karantez.

#### SETU PERAK :

Goude bean pedet an Otro Doue,  
Ha 'n em glewet gant Otrone Chaloned Iliz-Veur  
Katedral Sant-Brieg,

Hon deus gourc'hemennet hag e c'hourc'hemennomp ar pezh a zo aman warlerc'h :

#### ARTIKL I

Digas a reomp da sonj d'ar gristenien, eo gourc'hemennet gant an Iliz da gement hini a zo eur bla war-n-ugent achu ha n'eo ket c'hoaz krog en tri-ugent vla, iun bemde, nemet da zul, e-pad ar C'Hoareiz; ha, da gement hini a zo seiz vla achu, ober vijel: de Verc'her-ar-Meur; peb gwener ha peb sadorn, e-pad ar C'Hoareiz; ha, gant an Daouzek-Deio, da verc'her, da wener ha da sadorn.

#### ARTIKL II

Koulskoude, gant permission Hon Tad Santel ar Pab, roet an 22 a viz C'houever 1922, e vo groet en Eskopti vijel d'ar merc'her elec'h d'ar sadorn e-pad ar C'Hoareiz.

#### ARTIKL III

Gallout a c'heller dibri kig de Iaou-C'hemblid; ha, da Sadorn-Fask, adaleg kreiste, e vo achu da iun ha da vijel ar C'Hoareiz.

#### ARTIKL IV

E-maëz ar C'Hoareiz e zo vijel kuit a iun, peb gwener; iun ha vijel en de diarog ar pevar gouel bras-man: gouel ar Pentekost, gouel ar Werc'hez Hanter-Eost, gouel an Oll-Sent ha gouel an Nedeleg. Koulskoude, herve ar c'hustum aboe gwejall amzer,

en hon Eskopti na vo na iun na vijel de sadorn ar Pentekost, nag ive de 'rôk gouel ar Werc'hez Hanter-Eost dre bermision Hon Tad Santel ar Pab.

#### ARTIKL V

N'eo ket difennet dibri e-pad ar C'Hoareiz kig ha pesked d'ar pred.

E-kerz ar C'Hoareiz, e c'heller ive dibri uo, de Wener ar Groaz zoken.

Ar re 'zo dleet d'e iun, n'allont, en deio iun, dibri uo nemet d'eur pred hepken.

Gallout a c'heller implian bemde leaz hag amann gand ar pred bihanan zoken.

Gallout a rer implian bloneg ha zoa d'ober souben ha da ôzan boed, en deio iun ha vijel, koulz en tri dediwean euz ar Zun Santel hag en amzer-all.

#### ARTIKL VI

An Otrone Personed, beleien ar c'houdencho hag ar c'hovezour, a roio brasoc'h dispans c'hoaz, mar be ret, d'ar re a c'houlenn digante.

Kelenn a refoint start ar gristenien da ziwall ouz an evaj hag ouz ar vèventi ; rag an tech fall-ze a zo, evel eur gwall walen, o waskan hon bro.

#### ARTIKL VII

An Otrone Personed a alio ar gristenien da gomunian gant Pask peb hini en e Iliz-parrouz ; neb an nije groet e-lec'h-all e gomunion-bask a dle hen rei da c'hout d'e Berson.

An Amzer Bask a zigoro ar bevaret sul eus ar C'Hoareiz, hag a glozo d'an eil sul goude sul Fask.

Ar vartoloded, a ia da besketa da bell bro, a c'hallo ober o fask adaleg miz C'houever.

#### ARTIKL VIII

Alian a reomp ar Bastored da zarmon diou wech ar zun, e-pad an C'Hoareiz, ha d'ober Hent ar Groaz da wener. Goude, e vo gallet rei Salud ar Zakramant.

#### ARTIKL IX

Pidi a reomp ar gristenien da ren bue santel, da vean devot d'an ofiso, da zont d'ar zarmonio, da ziwall eus ar pec'hed, da laret ar pedenno, en o zi ; ha, da rei *Aluzen ar C'Hoareiz*, peb hini herve e zanve.

Astenn a reomp an dorn da c'houlenn, en han' Doue, an aluzen-ze digant holl gristenien an Eskopti ; rag, mac'h eo dleet en peb amzer ober aluzen, koulz a ve, neb an neus peadra, a renk ober anei gant mui a volonte vad c'hoaz.

N'eus forz pegen bihan e ve aluzen ar paour, tenna ra, war-n-an ha war e di, bennoz an Otro Doue.

#### ARTIKL X

Aluzen ar C'Hoareiz a vo roet en o dorn d'an Otrone Personed pe da veleien ar c'houdencho. Mad e ve koulskoude lakât e-barz an Iliz eur c'hef merket warnan : *Aluzen ar C'Hoareiz*, evit digemer arc'hant ar re e ve dies d'e hen kas d'an Otro Person.

ARTIKL XI

Pidi a reomp ar gristenien da rei, peb hini muian ma c'hallo, evit ar Seminerio, evit ar Skolio kristen hag evit Diner ar relijion.

Fournis d'ar Seminerio ar pez o deus ezom, ha, muioc'h c'hoaz, sevel eur Seminer nevez, a zo daou dra a n'eont ket hep damant na poan-spered.

Kontan a reomp war largentez ar gristenien da zikour anomp da gas da-benn an obero mad se a zo ret dere'hel evit sevel ha diski ar re a zo galvet da vont da veleien.

Koulz all, hepar Skolio kristen, hen gout a ret, n'eus ket relijion gant deskadurez ar vugale, hag ar fe hec'h-unan a ia da goll.

Ret eo, kousto da gousto, mirout ane.

Diner ar relijion a zo evit zikour ar veleien n'o deus ken paë ebet digant ar gouarnamant ; anez an aluzen-ze, na voint ket evit bevan ; ha gant-se, eo dleet da bep kristen rei anei, herve e c'halloud, ha dindan boan a bec'hed.

ARTIKL XII

De Sul ar Rouane, e vo gret ar gest evit ar Sklaved ; kest Gwener ar Groaz a vo, herve bolonte Hon Tad Santel ar Pab, evit an Douar-Santel ; hini sul ar Benz, evit ar bevien glanv ha diremet 'zo en Hospital Sant-Brieg ; hini gouel an Ebestel sant Per ha sant Pol, evit Diner Sant-Per ; hini zul ar Rozêra evit ar skoliou kristen ; hini an eil sul a viz du, evit an ilizo paour eus hon Eskopti ; hini an eil sul eus an Avant, evit ar zoudarded hag ar Yaouankiz kristen.

Ar sul diwean a viz Genver ha de ouel an Asansion, e vo kestet evit ar Skol-vraz hanvet en galleg : *Université Catholique*.

ARTIKL XIII

Pa zigoco unan-benag eus ar c'hesto-man, pe ar gest evit ar Seminerio, e vo roet da c'hout d'an dud adaleg ar sul arog, en pron an oferen-bred, hag an arc'hant a vo digaset d'an Eskopti.

Pep kest a renker ober anei en holl oferinio hag ofiso.

Al lizer-man, gant gourc'hemenno ar C'Hoareiz, a vo lennet en pron an oferen bred, en holl ilizo ha chapello an Eskopti, ar sul warlerc'h ma vo arru.

Roet en Sant-Brieg, dindan on zin, on ziel, ha zin Sekretour Braz on Eskopti, an 21 a viz c'hoevrer 1927.



† FRANÇOIS-JEAN-MARIE,  
*Eskop Sant-Brieg ha Landreger.*

Dre urz an Otro n-Eskop :

P. ROSE,  
*Chaloni, Sekretour Braz.*



---

2-28 — Saint-Brieuc. Imprimerie PAUD'HOMME.

---

